




PHOTO JOS LE DOARÉ

Breiz ar menezioù e-kreiz yenijenn ar goanv.

BLEUN-BRUG

Niv. 107 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GENVER 1958

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.
C. C. P. 544.22 Nantes**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

An Aotrou Favé anvet da Eskob , gand L. B.	1
On Eskob nevez , gand V. S.	2
Etre skillfou ar maro (kendalh), eñvorennoù A. Guichen lakaet e brezoneg gand Job Sêité	5
E Brest eo bet en overenn , gand Petromik	9
Sant Gwenole hag an Ankou , hervez Alan Gerne	10
(brezoneg gand Arzel Gervorvan)	
E Inizi Hebridez, e Bro-Skos , gand H. Sinclair	12
(brezoneg gand Y. G.)	
Teñzor ar brezoneg beo , gand V. F.	15
Kan notennoù ar skeul-gan , gand L. Lok	17

Eun leor nevez :

EUN DASTUMAD KANAOUENNOU BREZONEG

Ar horonal Bourgeois, marvet e Brest e 1904 e-noa dastumet eur bern kanaouennoù-pobl e Breiz-Izel.

Kenveureniez Sonerion Pariz a zo o vond da embann heb dale eun dibab euz ar hanacuennou-ze, eur pevar-ugent bennag anezo, bet dastumet etre ar bloavezioù 1850 ha 1900. An tonioù a zo da heul ar homzoù. Talvoudeg dreist e vo al levr e peb keñver ; n'ouzom ket c'hoaz priz ebed dezañ.

Evid gouzoud ped skouerenn embann e pedom an neb a garfe kaoud al leor da gas dioustu e ano da : **Hervé Le Menn, 3, rue Francis-Garnier, Paris (17°).**

133856

An Ao. FAVÉ anvet da Eskob



Eur halanna kaer a zo deom gant gouel Nedeleg hag ar bloaz nevez : an Ao. **Visant Favé**, vikl-vraz Kemper, o zo bet anvet da Eskob ha galvet da skora an Ao. **N'Eskob Fauvel**, en e holl labourioù.

Ar helou a zo bet eul laouenidigez vraz evid an oll Vretoned, ha dreist pep tra, evid mignoned ha lennerien « Bleun-Brug ».

Piou ne anavez ket an Ao. Favé ?

Koulz lavaret, bep miz, abaoe meur a vloaz 'zo, e skrive, en or helaouen, ar penna-dou boueduz-se, a gaver atao enno kement a zaour hag a sklerijenn.

Beleg a zeve hag a galon, sanket en deus doun e roudou, en oll dachennou eo bet galvet da labourad enna : evel kure e Skaer, e penn yaouankizou kristen ar mêzioù, evel person Lesneven ha person Kastel... E pep leh eo bet abostol Feiz ha Breiz — breizad a ouenn vad. —

Ne ankounac'hom ket eo eñ, gand eun nebeut mignoned, eo en deus saveteet lestr ar Bleun-Brug, pe venne ober pense, goude amzer trubuilhuz ar brezel...

Euruz om aman o kinnig d'an Eskob nevez or gourhemennoù doujuz ha breizad, o houlenn evitan digant Doue nerz kalon ha yehed mad. Ra jomo pell hag hir amzer ganeom, en Eskopti Kemper, e serr on Eskob karet, an Ao. Fauvel, d'or sturia war hent ar vuhez, war-du porz ar baradoz.

L. B.



on eskob nevez

Gand gouel Nedeleg 1957 ez eus deuet beteg ennom eur helou braz ha leun a joa, e-neus laket da dridal oll vignoned ar «Bleun-Brug», an aotrou Fave a zo anvet da eil eskob Kemper ha Leon.

Piou ne anavez ket an Aotrou Fave? N'eus ket eur beleg e Breiz-Izel hag a ve muioh anavezet egetañ. N'eus ket eur beleg e Breiz-Izel hag e-nefe muioh egetan labouret war dachenn ar Feiz na war dachenn Breiz. Hini ebed, muioh egetañ n'e-neus labouret muioh e-touez ar bobl. Hini ebed ne oa tostoh d'ar bobl, nag hini ebed gouestoh egetañ da gomz dezi e yez he zadou koz. N'eus ket eta da veza souezet tamm ebed e-nefe on Tad Santel ar Pab e zibabet da veza eskob skoazell an Aotrou 'n Eskob Fauvel, da gas en-dro brasa ha pouezusa eskopti Breiz.

Re vraz eo eskopti Kemper ha Leon, a dra-zur, evid eun eskob hepen. Fur e oa bet on Tadou, gwechall, oh ober anezañ daou eskopti, hini Leon hag hini Kerne. Hirio ne adsaver ket an daou eskopti, méd rei a reer daou eskob d'an 800.000 kristen a zo ennañ o chom.

An Aotrou 'n Eskob Fauvel a vezo bet al laouenna, heb douetañs, gand ar helou-se, rag an Aotrou Fave, eur poanier, eul labourer, hag eur beleg gouest evel ma 'z eo, a ouezo skañvaad dezañ ar beh pounner mantruz e-noa da zougenn, evid brasa mad ar feiz en eskopti.



Ginnidig eo an Aotrou 'n Eskob Fave euz parrez Kleder, e Bro-Leon, bet kristenet er pempved kantved, gand Sant Ke, pe Sant Kleder.

Dond a reas er bed e 1902 en eur 'familh gristen, a zo bet enni daouzeg krouadur. Dég a zo beo c'hoaz hirio, hag en o zouez e kaver diou leanez.

E vamm, 82 vloaz dezi, he devo an eur vad da weled sakri he mab. An tad, avad, ar «Fave koz» bet ken anavezet e Kleder a zo maro, siwaz! abaoe 1946.

E studiou a reas e skolaj ar Hreiskêr, e Kastell-Paol. Azaleg 1920 her havom er Hloerdi-braz, e Kemper, beteg ar bloaz 1925 ma oe beleget.

Skaer a vo an dachenn genta ma labourou warni, ha chom a ra eno c'hoaz, an eñvor stard anezañ. Ne oe ket pell evid gounid kalon an oll dud. Poania ' reas da zeski ervad o rann-yéz ha komz a re da bep hini evel eun dén euz ar 'familh.

Mond a ra daved ar yaouankizou, gand oll nerz e ene leun a dan. Sevel a ra «Gourennerien» Skaer, ha gand ar re genta e vo o kas en-dro ar J.A.C. pe Y.K.A.M., ano brezoneg bet savet gantañ, da lavaret Yaouankizou Kristen Ar Méziou.

An Aotrou 'n Eskob Duparc a welas abred an danvez a oa ennañ. Er bloaz 1935, e oe anvet da skoazella an Ao. Chaloni Goasguen, e penn Oberou Kristen an Eskopti. Sevel a reas da vad ar J.A.C. ha Doue ' oar hepen ar vad divent a reas eno da baotred yaouank ar méziou. Kement a grog e-nevoa warno, ma ree ganto ar pez a gare.

Embann a reas evito, e brezoneg: «War roudou an hader». 1000 skwerenn (1937) — «An éd e bleun», 1000 skwerenn (1939) — «C'hoariomp», 1000 sk. (1942) — «Kanomp», 5000 sk. (1942) + 2000 sk. (1943) + 2100 sk. (1944) — «Kanomp c'hoaz», 2000 sk. (1943) — «Eun eurig dirag a Zakramant», 1000 sk. (1937) — «E skol ar Werc'hez», 3000 sk. (1938) — «D'an daoulin evid ar vro», 1000 sk. (1940) — «Pedenn an dud diwar ar mēz», 17000 sk. (1940) — «Rozera al labour», 15000 sk. (1942) — «War an daoulin evid ar vro», 15000 sk. (1943) — «Gouel ar mammou», 5000 sk. (1943) —

«Pedomp», levrig pedennou evid an Y.K.A.M., 7000 sk. (1942) + 2000 (1943) + 2000 (1946) — «Karomp hon nesa», 13000 sk. (1945) — «Itron Varia ar Garantez kaer», 10.000 sk. (1946) — «Dre an Aotrou Krist», 6000 sk. (1947) — «Kroaz ha levenez», 6000 sk. (1948) — «Hor Pardonioù», 5000 sk. (1946).

Evid danvez labour d'ar re yaouank e-pad beilhadegou ar goañv, e skrivas evito: «E servij ar vro», 700 sk. (1942) — «Gwazed a zoare», 800 sk. (1943) — «Eur gwaz e rankez dont da veza», 400 sk. (1943) — «War araok», 1400 sk. (1944) — «Daou ha daou», 1200 sk. (1945) — «Hol labour hag hon amzer da zont», 800 sk. (1946).

En eur ober dég vloaz e-neus kavet an tu da zevel pe da renka 24 levrig ha da ingala, dre ar J.A.C., 182.400 anezo e-touez kristenien ar Finister. Piou e-neus greet muioh egetañ war an dachenn-ze? Piou a zo bet hag a vezo skrivancier brezoneg kristen muioh egetañ? Eul labour ramzel, e gwirionez, hag henn laka er penn kenta hag a-bell e-touez ar vrezonegerien

Ne gomzin ket euz e amzer vrezel, el leh ma reas e zever kement, ha moarvad muioh e ged an darn vuia euz ar Hallaoued, heñ Breizad penn-kilha-troad.



Kuitaad a reas ar J.A.C. e 1946 evid beza person kanton parrez Lesneven. Chaloni a enor e oa dija abaoe deg vloaz. Tri bloaz goude, an Aotrou 'n Eskob Fauvel a rô dezañ ar garg euz parrez vraz Kastell-Paol, kerbenn Bro-Leon.

War e dachenn labour nevez e labourou gand kement a dan. Biken ne ziskouezo beza skuit. Netra n'henn lakaio da fallgaloni. Dre e galon vad e hounezo an oll. Hada a ra laouenedigez dre ma 'z a, hag entana ar re o-deus an eurvad da helloud komz gantañ. Ne ankounac'ha hini ebed euz e barre-zioniz. Mond a ra da weladenni «paotred ar sukr», ha dre ma 'z a e sav gouelioù evito hag e klasko gwellaad o stad.

Pa vo anvet da Vikel-Vraz, e 1956, e vo keuz braz dezañ e Kastell-Paol.



An Aotrou 'n Eskob Fave a zo bet ive aluzenner ar Bleun-Brug. Lakeet e oe ar garg-se dezañ war e ziouskoaz, gand an Ao. n' Eskeb Duparc, goude maro poanier an Aotrou Perrot, e 1943.

Pa vo adsavet ar Bleun-Brug gand an Doktor Liberal, e Kastell-Paol, e 1948, an Aotrou Fave eo a raio ar brezegenn genta da enori an Aotrou Perrot, ha da lavared perag, goude an darvoudou brezel, e felle d'ar Bleun-Brug adkregi gand e labour evid Feiz ha Breiz.

Bleun-Brug braz ar Zent, e Kastell-Paol, e 1950, a zo bet kaerra ha brasa Bleun-Brug a zo bet biskoaz. An Aotrou Fave a oa eno person d'ar mare-ze, anez da -ze, biken ne vije bet savet e Kastell eur seurt gouel. An nerz-kalon a ziskouezas a-eneb kement-all a zisterioù, hag ar boan a gemeras skoazellet gand an ao. Louis Mallegol eo a reas d'ar Bleun-Brug-se beza ken dispar.

Diwar neuze e chomo digor braz an hent dirag ar Bleun-Brug, ha dén ebed, na netra ne viro mui outañ da vond war-raog.

E alioù fur ha poelleg, gand skoazell hegarad an ao. Gab ar Moal ar penn-rener, a viro ouz ar Bleun-Brug da vond war henchou troïdelluz a vije bet riskluz evid e amzer da zond.

Rei a ra d'ar gevredigez eun diazez stard hag asur, er-mēz a bep politikerēz, a hounezo fiziañs an oll, ha kalon ar bobl.

Skoazella a ra labour brezoneg sekretour ar Bleun-Brug er skolioù. Eun harp talvouduz e vezo hepred evitañ. Gouzoud a ra rei kalon bep tro ma vez réd ha fizians en despet da bep tra.

N'eo ket eun hufivree, evel ma 'z eus kalz re en emzao brezeg, méd eun dén hag a zo e zaou droad stard war an douar hag e benn troet mad

da vaga menozioù efeduz. Eun dén ha ne goller ket an amzer o vond d'e heul.

Pa deüo evitañ ar mare da guitaad ar Bleun-Brug, e ouezo lakaad en e blas tud hag a valefe war e roudou : da genta, an Aotrou Bihan, aluzenner Skol an Ofiserien a Vor, ha goude, pa ranko hemañ kuitaad Breiz da heul al listri-brezel, an Aotrou Falc'hun, kelenner Skol-Veur Roazon.

E galon aour, ouspenn, a zo anavezet mad. Koulz e Kastell-Paol hag e Kemper, e di a veze digor frank bepred ; ha nikun ne azeze ouz e daol heb beza kennerzet e pep doare.

Ne ro ket hepkén aliou mad. E yalh, hag ni atao gwall dreud, a zo bet digor dalhmad da ezommou ar Bleun-Brug.

Eured aour ar Bleun-Brug e 1955 e Landi, e vezo bet kurunidigez e labour breizeg. Gand pebez joa e-nevo bet, derhent an deiz-se, lavaret an overenn e *Koatkeo*, ha digaset gantañ goulou an overenn-ze evid overenn hanter-noz Keryann-Sant-Nouga.

Beza person ha Vikel-Vraz, ne viro ket ouz an Aotrou Fave da voueta ervad ar helaoennou « Bleun-Brug » ha « Les Cahiers du Bleun-Brug ».

Ar roll hepkén euz ar pennadoù embannet er bloavezioù diweza a ziskouez talvoudegezh e skridoù.

Da genta, war Bleun-Brug.

Ebrel 1951 : *Broada ha divroada*. — Gouere 51 : *Porz-houarn Kastell-Paol*. — Gwengolo 51 : *Lakaad disparti, pe unani*. — E Keranna gand gouelioù ar *Bleun-Brug*. — Mezeven 53 : *Prezegenn evid benniga mên kenta Land-ven-neg*. — Meurz 54 : *An dolmen torret*. — Kerzu 54 : *Noz Nedeleg an ostiz fall*. — Ebrel 55 : *E ser c'hoari*. — Mezeven 55 : *Da sklêrijenna hon hent*. — Here 55 : *Goude gouelioù Landivizio*. — An Tad Santel hag ar zevenadure-zioù. — Du 55 : *Ar rederien henchou*. — Genver 56 : *E Bro-Israël ar C'hilb-boutzim*. — C'hwevrer 1956 : *Trema an heol o sevel*. — Even 56 : *Ar mele-zour drailhet*. — Eost 56 : *Arabat mouga eur zevenadur*. — Du 56 : *N'emaom ket o labourad diouz an deiz*. — Kerzu 56 : *Pôtr ha plah yaouank*. — Genver 57 : *An Aotrou Falc'hun, aluzenner ar B.B.* — Ebrel 57 : *Dorn-skridoù ar Mor-Marô*. — *Tefizor ar brezoneg beo* (e niverennoù Ebrel, Mae, Gouere, Eost, Gwengolo ha Kerzu 1957).

D'an eil, e galleg e-barz « Les Cahiers du Bleun-Brug ». — Niverenn 1-1957 : *Assises pour une culture bretonne*. — Niv. 2-57 : *En faveur de la langue bretonne, l'apport de l'Eglise*. — Niv. 3-57 : *L'Eglise et la langue bretonne* (Eléments de solution). Ar pennad diweza-mañ, a zo bet embannet ouspenn er « Semaine Religieuse » eskopti Kemper ha Leon.

Setu labour an Ao. 'n Eskob Favé war dachenn *Feiz ha Breiz*.

Ra gavo amañ anaoudegezh vad ar Bleun-Brug evid e labour kristen ha breizeg, on lorch ive d'e weled eskob, hag or gwella gourhemennou e karantez Doue ha Breiz.

V. S.



Etre skilfou ar maro

Envorennoù eur paotr yaouank euz Montroulez, Albert Guichen,
renket ha lakeet e brezoneg gand Job Seite

Dora.

Eun dervez, war zigarez n'ouzon ket petra, e oe cheñchet plas da va zreid. E Buc'henwald em-eus desket petra eo buhez eur galeour. En eur hamp all, ken iskiz, ken gwaz, on taolet : Dora. Amañ avad buhez eun den a dalv nebeud a dra. An dud a varv evel kelien : beteg 200 bemdez. Eun uzin, kleuzet dindan an douar, a zo harp ouz ar hamp. Enni e vez labourer war binvioù brezel n'int hoaz implijet nemed gand an Almanted : ar bombezennou V1 ha V2. E Gwiseni am-oa desket micher ar mekanisian, amañ bremañ e rankin labourad war va micher. Daou, tri drefniad heb miz a dud a zo dister kaoud amañ : eul labour tenn, nebeud a voued, kleñvejou a heb seurt, a deu a-benn euz al lodenn vrasa ahanom. Euz an uzin d'ar 'fourn, karrigellajou korvou maro a verk a-walh e peseurt leh spontuz emañ.

Labourad a rankom e-pad daouzeg eur bemdez hag atao ar memes kundu treut, ar memes mohaj da zebri. Er penn kenta eo divennet ouzom en em walhi. A heb seurt amprevaned a red warnom, e-touez al loustoni a zo stag ouzom. Santoud ha kleved a reom al laou, ar c'hweñn o redeg en or pallennou, en or golhejou. Pa vezom paket oh en em walhi, om kitez gand eur roustad bazadou. An tifus a grog neuze ennom. Dioustu ar zoudarded S.S. a gemer aon hag a ro droad da en em walhi adarre. E diabarz an uzin, eur gêr dindan an douar, e pakom heb an amzer taolioù foet e-pad al labour. Plega a reom or hein heb tro ma tremen eur soudard en a-dreñv deom, war hed atao euz eun taol matrak bennag.

A-gevred gand M. Prigent, e talhan mort, e serran va dent. Kousto pe gousto eo red delher. Maurice avad n'e-neus ket kement a imor. Dinerzet gand an dienez hag ar poaniou gouzañvet, e gorv n'hell mui stourm. Sempla : ra aliez hag ar zoudarded a lorgn warnañ neuze evid esea degas anezañ ennañ e-unan. Allaz ! red eo din chom da zelled heb galloud dond war e zikour, pa gouez an taolioù digernez warnañ. Pa hellan e sikouran anezañ euz va gwella evel ma ra din va-unan, pa vez va zro da baka eun trepagn. Astennet diouz an noz war or golhedou goloet a loustoni, e komzou aliez euz or buhez tremenet, euz devezioù eüruz ar 'frankiz.

Maurice a goll nebeud ha nebeud e nerz, deiz goude deiz. Evitañ oan prest d'ober peb tra. N'hellen ket soñjal e hellfe eur mignon evel-se beza tumpet gand ar maro, evel ar re all. E gleñved a yee koulskoude war wasaad bemdez. Louzeier n'oa ket, medisin ebet kennebeud. E Dora, an traou-ze n'oa ano ebet anezo. Maurice a wel a-walh pegement e klasken e zikour. Dihalloud e choman siwaz dirag e gleñved. En em gared a reom evel breudeur. Siellet on-oa ar garantez er boan. Ar maro hebken a helle terri ar jadenn on stage an eil ouz egile.

Eun devez, e lavar din : « Gouzoud a ran e tistroi d'ar gêr, rag gweliet am eus ez out gouest da stourm. Evidon-me, ar vuhez-mañ a zo re rust, re haro. Me oar emañ o vond da vervel. Ro din da hér araog, ez i da gaoud va herent, pa zistroi. Lavar dezo em-eus soñjet enno kalz, em-eus goulennet pardon diganto evid ar boan am-eus greet dezo. Bremañ, e welez da-unan, peb tra a zo cheñchet. Bremañ e ouzon pedi, e kredan e Doue. Ar maro avad ne ra ket aon din ken. Red eo bet din diskenn beteg amañ evid kompren galloud Doue, evid dizelei talvoudegezh ar vuhez er bed-mañ. »

Selled a ran outañ, mantret ha sebezet gand e gomzou : « Va homzou o-deus an er da zouezi ahanout, a lavar din. Entent mad ahanon. Red eo bet din, ya,

tañva ar vizer evid dond da gompren ez eus Unan uhelloh egedom. Pedi a ran n'eo ket ablamour ma ' m-eus aon, med ablamour ma'z an da vervel evid mond dirag Doue. »

O Maurice ! kement tra az-peus lavaret din en dervez-se a zo chomet garant don em spered. Amañ e tisklerian anezo evid ma ouezo an oll o lenno kredi ez eus atao eun Doue en neñv prest d'o zikour da zond d'e gaoud.

Mond a ra kuit eun dervez da heul klañvourien all eveltañ. Ne jom gantañ nemed eskern ha krohenn : eun den hanter-varo eo dija. Deuet on a-benn da houzoud goude-ze eo marvet e kamp Belsen-Bergen. Ma n'em eus ket bet an eurvad d'e weled war e dremenvarn e ouezan eo marvet evel eur zant, heb klemm, dibradet m'oa dija diouz an douar gand tan feiz e yaouankiz o flamma adarre en-dro. Deuet da gompren a-nevez talvoudegez ar relijion, emañ aze kreizenn ha bouedenn ar vuhez, Maurice, e-pad ma teuze nerz e gorr, a zave e ene war-zu Doue heb an disterra diéamant.

Seiz euz Montroulez e oam e Dora, er penn-kanta. Pa 'za Maurice diouzom, ne jom mui nemed daou ken. Koll a ran neuze va nerz-kalon, va imor, e-pad meur a-viz. An eil goude egile va mignoned a zo maro. Bemdez neuze e hedan va zro ive da vond en tu all. An dizesper, evel ar hrign-beo, a dag va spered. Teuzi a ra va imor ha ne ran forz ebed ken gand ar vuhez. Aliez eh en em lezan da gousked war va labour. Neuze e kouez war va hein adarre taoliou digernez a-berz ar zoudarded. Goloet a loustoni, truilheg, eh en em lezan da riskla nebeud ha nebeud e puñs an dizesper.

Er stad-se e kav ahanon eur beleg euz Bro-Hall, eur mintinvez a viz Mae 1944. Poent braz eo dond war va zikour. Mall braz eo va diarbenn euz ar hleñved a zo krog ennon. Kavoud a ra an tu d'am hennerzi. War lerh e gomzou e teu adarre en-dro va nerz-kalon, e krog an esperañs da virvi em hreiz a-nevez. C'hoant am-eus kommunia, met, e Dora, seurt frealzidigez a zo divennet.

Koulskoude e welan dioustu ne jomfe ket va goulenn a-dreuz. E daoulagad ar beleg e welan eul luhedenn a joa, war e vuzellou eur mouse'hoarz a levenez.

« Doue a zo e peb leh, a lavar din. Prest out d'e reseo ? » Leun-barr eo va halon a levenez. Dizez eo renta kont euz ar peoh, ar joa a ziskenn neuze em halon. Gouzoud a ran : n'hellan ket sevel uhel a-walh labour nerzuz ar veleien kemmesket ganeom, beleien genidig euz peb korn an Europ. Int-i o-unan ne glaskent ket meuleudi na gloar. Klask a reent hebken ober vad en dro dezo ha pell edont diouz soñjal e hellfe o abostolerez sevel anezo war eur bazenn uhelloh eged ar re all. Falvezoud a ra ganin koulskoude disklêria amañ o nerz-kalon o-deus diskouezet bepred e-kreiz an trubuilhou a gavent en dro dezo.

Heb aon dirag ar maro a nije bepred warno, o-deus lodennet ganeom ar vizer o-deus skoazellet, harpet heb gina ar re a hellent sikour. Gwisket truilheg evelom, touzet o bleo evelom, brevet ha kastizet en o horv, kavet o-deus atao nerz ha kalon da stourm heb klemm. Eur skouer beo ha talvouduz int bet evidom. Morse n'o-deus kilet dirag bolontez Doue, morse n'o-deus pleget dirag mennoziou diaouleg ar re o gwaske. Deuet int a-benn a-wechou da rei deom bara an neñv, da ginnig an overn beb an amzer en or barrakennou, daoust m'o-doa divenn d'henn ober.

E kuz on koveseet gand ar beleg. Euz e hodell e tenn neuze eur voestig houarn merglet, enni ostiou konsakret. Unan anezo a zo evidon. Dioustu ez a kuit hag e choman va-unan-penn, gand Doue em halon.

Diwar neuze e teu din va imor ha va fizañs adarre. Kousto pe gousto e talhin mort. Koulskoude or buhez e Dora a zeu da veza rustoh rusta. Gand an naon, an dienez euz peb tra e varv atao kalz tud. An Almanted a groug en eun dervez hebken beteg seiz ha tregont : Frañsizion, Rused, Poloniz. Etre o dent e veze laketa eun tamm koad evid mired outo da grial. Neuze dirag an oll, bodet, e veze lakeet ar gordenn en dro d'o gouzoug. O horvou a jom goude-ze a-istri-bilh, dirag eur 'foz, en or hichenn. Red eo deom ouspenn tremen dirazo, steki

outo. Seiz ha tregont a zo dibabet en on touez evid o distaga, evid o has beteg dor ar 'fourn. Pemp, c'hweh eur kousked on-eus nemetken. Ar rest euz an noz a dremenom aliez war blasenn ar hamp, da hedat ar galv, dirag ar barrakennou. Meur a wech, e kreiz ar goañv, e vez greet deom en em ziwiska euz an traon beteg an neh hag aze e rankom chom e-pad meur a eur, dindan eur yenijenn hag a ziskenn a-wechou beteg —30°. Lod a gouez d'an douar, eeuni evel eun tamm koad, o izili sklaset, skornet. Pa dremen ar zoudarded dirazom, e rankom o zavel war o zreid, o dalher en o zav.

Setu va buhez e Dora. Eur wech em-eus gallet komunia, meur a wech em-eus heuliet an overn, astennet war va golhed. Ar beleg, gourvezet e-unan, a lavare e overn, evel e kuz, gand aon e tegouezfe er varrakenn eur gward bennag. Morse n'hellin ankounac'haad ar vuhez dinatur ha skrijuz am-eus bevet e Dora. Dre vuzud koulz lavared on deuet er-mêz anezañ.

En hent war-zu Ravensbruck.

D'an ampoent, en eun taol-kont, e teu an urz da guitaad Dora. An Amerikaned a-deu war-raog hag a dosta buan. Poent d'an Almanted skarza. Araog loh kuit, eo lakeet an tan e peb tra. Seiz ugent e peb bagon ha kuit. E-pad eiz devez hag eiz nozvez e chomom war railhou, heb kaoud tamm da zebri. Teir gwech hebken on-eus eur banne dour da eva. Em bagon e tremen darvoudou skrijuz, sikiz. Evid kaoud muioh a blas, lod, hanter gollet o 'fenn, a ya beteg en em laza. Ar horvou maro a zervij da skabell. Tud n'om ket ken. Loened kounnaret, follet om kentoh an eil ouz egile. Ar re her gree hebken a hell chom beo. Meur a wech eo bet tost din beza flastret va-unan. Dre vuzud e teuan a-benn da zalher penn, da zavel war gorre. Santoud a reom on nerz o teuzi. Sevel eur vreh hebken a zo evel digeri eur goul. Ar maro eo a hellfe lakaad eun termen d'or poaniou. Goude ar zehed, eun naon ruz a lamm warnom.

Pa zegouezom e Ravensbrück eo eun druez or gweled, evel spontailhou om. En eur ziskenn euz ar vagon, e kouezan evel eun tamm plom war an douar, semplet. Dindan an taoliou a gouez war va hein dioustu, e teu din va ententamant. Gand an nebeud nerz a jom ganen, e teuan a-benn da vriata eur hamarad a hell chom en e zav. Gweled a ran neuze taolennou trubuilhuz na ankounac'hain biken. Kouezet d'an douar, lod n'hellont mui sevel, daoust d'an taoliou a bakont. Nerz awalh hebken da zavel o 'fenn a jom ganto a-veh, nerz da zelled gand anken ouz ar zoudard S.S. didruez en e zav, en o hichenn, ar revolver en e zorn. Pebez sellou a druez a zeu euz o daoulagad ! O izili ne zentont ket ken, o 'fenn a gouez. Echu eo ganto. Eur zoudard a dosta outo, o laz dre eun tenn en o joug.

Eur spont, setu kamp Ravensbrück, greet dreist-oll evid ar merhed, o deus bet da houzañv eno a beb seurt traou euzuz. Ravensbrück, Auschwitz, Belsen, Dachau, n'ouzon ket pehini eo ar vrasa, ar hrisa : ra vint milliget evid atao !

An heol o para.

N'emaon ket hoaz e fin va halvar. Koulskoude, trouz ar hanoliou o kroñal e tu ar zav-heol hag e tu ar huz-heol a dosta. Or bourrevien a zant buan eo red skampa, ar buanna ar gwella, euz eul leh re holoet a gorrmaro, a jom evel testen euz o zorfejou. Hag adarre en hent, med en taol-mañ war droad. Evel eur vandenn zaout, a beb tu deom soudarded S.S. gand o 'fuzuilh, ez om heurtet war-raog, war-zu n'ouzon ket peleh. Ar re a gouez en hent, trehet gand ar skuizder, ar zempladurez, a vez lazeta gand eun tenn en o 'fenn. « Ar re varo n'hellint ket rebech na komz » a zoñj ar re a zant dija war o zeuliou morzol ar hastiz. Ni a vale, a vale hoaz, hanter-zihun, daoubleget. Dalher kousto pe gousto, chom er zav keid ha ma vo gallet, aze emañ an dalh. Goude triweh miz a drubuilh, a boan, a vizer, e vefe dipituz koueza en hent, mervel, dreist-oll pa sked dirazon eul luhedenn a esperañs. Ken tost all d'ar 'frankiz,

È sav aon ganin da jom a-dreuz. Va divesker a horjell dindanon, va daoulagad a stag da dreli : peb tra en dro din a dro. Koueza ! Med neuze e vefe taol ar maro evidon ! Tri dervez ' zo n'em-eus debret netra. Hanter-varo eo va izili. Va zreid, deuet da veza pounneroh pounnera, a ruz en hent.

O ! Nag eüruz e vijen ma helljen gourvez war ar peuri, e bord an hent ! Pegen êz e vije en em lezel da rikla e foz al levhent ha kousked ! D'an ampoent setu an noz o tiskenn en-dro din. D'am zoñj edon o rikla a-hed eun diskenn (diribin). Bale ! med ne reen mui, poan ebed ken ! Ha tra sebezuz, tamm naon ebed ive !

Pa zihunan, e welan gand souez emañ en eur 'foz, astennet, a-hed eun hent a gas da n'ouzon da beleh. Almanted eo a dremen war an hent, em hichenn, o tehed. Obuziou a gouez amañ ahont, beb an amzer, an tennou kanol a vez klevet o kroزال.

Emaon diere erfin, med n'ouzon ket hoaz. Moarvad, en em roet da gousked, oun kouezet, heb goùd din, en eur foz. A-hend-all e vijen bet gwelet. Evel kalz re all, em-bije paket eun tenn em 'fenn. E-pad daou zervez hoaz e choman er 'foz. Eno oun kavet gand an Amerikaned, tri dervez goude, semplet. Save-teet oun ganto. Goude eur pennad en ospital, oun distro er vro d'an 23 a viz Mae 1945.

Bez ' ez eus seurt levenez a zo diéz rei an tañva anezi d'ar re all, rag en diabarz eo e' chom. Pebez laouenidigez heb par koulskoude pa ' m-eus santet a-nevez êr ar frankiz o hweza en dro din, dreist-oll pa jomas an treñ a-zav dirag eun ti-gar, ha pa lennis war eur skritell eun ano ken c'hweg d'am kalon : « France ». Pemp om er hompartimant, on pemp eh en em lakaom da ouela. E-pad tri bloaz on-oa gouzañvet, on-oa stourmet evid gelloud tañva a-nevez an eürusted-se : gweled adarre bro or havell. Aze ive em-eus komprenet pegen kaer, pegen talvouduz, pegen c'hweg eo ar 'frankiz. Va joa, va levenez a ya hoaz war gresk pa stardan 'etre va divreh va herent, va mignoned, pa welan en-dro va bro garet Breiz-Izel.

Red eo bet din tremen e-kreiz tan an iverniou milliget-se evid kompren gwelloc'h peseurt teñzor kaer eo beva er 'frankiz. Evidon, beva diere, dieub, a zo gelloud komz, soñjal heb mên-harz ebed, debri hervez va naon, labourad heb heg, en eur gér, gelloud mond war-raog dienkrez ha dirouvenn, heb kaoud nag orjal na fuzuilh ebed en dro deom. Distro euz ar galeou daonet-se, e kredan kompren gwelloc'h talvoudegez ar vuhez.

Abaoe, an eürusted a zo deuet en-dro ha da heul eo krog adarre da drei vod an amzeriou dibreder euz va yaouankiz. Galeou an Almagh o-deus merket ahanon : re hir amzer am eus ranket beva skoaz-ha-skoaz gand ar vizer, skoaz-ha-skoaz gand ar maro. Poaniou a beb seurt am-eus gouzañvet, poaniou korv, poaniou spered. Ar boan avad a vez ankounac'heet buan hag hirio e talhan soñj dreist-oll euz ar garantez a zivanas ken kaer en on touez.

Garantet avad e chomo doun em spered ar zoñj euz an 208.000 den euz or bro, a zo bet diframmet euz o hêr, digand o zud, ha kaset du-hont en Almagh, e-kreiz ar spont, e-kreiz skilfou ar maro ; 32.000 anezo hebken a zo deuet beo en-dro. Skrijuz eo soñjal e kement-se. Pebez testeni d'ar bed : diskouez a ra penaoz e hell eur bobl koll e enor pa deu da goll e 'feiz.

Lod a lenno an istor-mañ gand evez hag en em zoñjal en dud a zo tremenet dre an iverniou-ze, a lavaro marteze : « Paour kêz tud ». Re all a daolo o bilim, o dismegañs war ar re a zo bet penn-kaoz d'an trubuilhou-ze.

D'am meno, arabad barn re vuan an eil hag egile. C'hoant am-eus bet rei da gompren n'int ket atao « paour-kêz tud » ar re o-deus bet da houzañv er giz-se. Diwar ar boan, diwar ar vizer, e tigor aliez an ene, ar galon da binvidigeziou ha ne vint prizet nemed er bed all. Or 'feiz, or harantez o-deus tro aze da greñvaad, da zounnaad, ar gasoni da vervel.

Morse na zoñjom kaoud droad da daoler on dispriz war ar re o-deus greet deom kemend a boan ha n'emañ ket ive or c'hoant o gweled, o tañva an hevelep mizer, an heveleb reuz. Kentoh e fell deom pardoni ha d'am zoñj eo aze eno emañ or brasa treh, or haerra kurunenn.

E BREST EO BET EN OVERENN

Yann, hirio, a zo kroget c'hoant ennañ da vond d'ober eun droidad da Vrest.

Pell 'zo n'eo ket bet e Brest.. Ar zul a zo... cheñch êr a ray vad dezañ.

E Brest e kavo overenn.

✱

N'eo ket ilizou eo a vank e Brest ; nag overennou kennebeud ; ha Yann n'ema ket ar hiz gantañ da jom heb overenn da zul.

Setu eun iliz ha Yann ebarz.

Pebez ilizad tud !...

Beteg ar penn uhella, stok ouz an daol-zantel, diouz an daou du... renken-nadou tud penn-da-benn. E traon an iliz, er renknad diweza ez eus eur gador houlo. Heb gortoz beza pedet — den ebed ne dro e benn da zelled outañ — Yann a gemer ar gador diberehenn.

— *Dominus vobiscum*, eme ar beleg.

— *Et cum spiritu tuo*, eme Yann, deuet ar bomm latin gantañ ken distagell hag ar re all. E Lannlutig ne glever nemed an hurust o chaokad eun tamm latin bennag ! Koulskoude n'eo ket mank e-neus an aotrou Person pedet hag aspedet e barrezioniz da respont oll asamblez !

Chom a ra mud Lannlutigiz !

Ha meur a hini anezo, ma kredfent añzao o zoñj krenn ha krak, a lavarfe eo ar pennad-amzer a dremenont en iliz, an enoeusa euz o dervez hag euz o zizun.

✱

Amañ eo beo an overenn ! ha divorfil ar gristenien !

Respont kreñv d'ar beleg... azeza... sevel er zav... daoulina, ober sin ar groaz, skei war boull ar galon... ha kement-se oll asamblez, a ro buhez d'eun ilizad kristenien oh overenna gand ar beleg.

✱

Souezus, eme Yann outañ e-unan ; amañ eo disheñvel an traou diouz Lannlutig. E Lannlutig, ne vez den ebed e penn-uhella an iliz ; nemed bugale ar skol war o bankeier d'an overenn-bred. E traoñ an iliz avad e vez tud... ahardi ! Beteg er porched ha dindan an tour... Evel m'o-defe aon o tond en iliz ha mall braz da vond er mêz ar henta 'r gwella.

✱

Yann a ra eur zellig ouz e amezeg. N'eus ket warnañ doare eun aotrou brasoc'h eged Yann... E wreg hag e vugale a zo en e gichen, eul levr overenn gand peb-hini.

Ha peb-hini a zo gand e overenn, n'eo ket ober an neuz eo, m'hel lavar deoh.

An ilizad tud a-bez, da genta poent, a zo gand e overenn... Evel ma vefe stag ouz ar beleg a zo oh overenna... Heb gouzoud dezan, Yann a zo evel dibradet gand an ilizad-ze.

✱

Dring... dring... dring...

Confiteor... ha setu ar gristenien o vond d'an daol zantel.

Da reseo an Doue beo dindan spes ar bara...

Mond ha dond a reont en iliz, en eur gana ; ya, en eur gana...

Esoh eo kalz konta ar re a zo chomet war o hador eged ar re a zo bet o komunnia.

— *Ite missa est!*

— *Deo gratias!* Bennoz deoh, o va Doue.

Echu eo an overenn.

Yann a gav n'eo ket padet pell...

Hag e sonj e vefe tu da ober e Lammlutig overennou ken beo hag e Brest...
ma teufe ar gristenien da gompren ne vez ket overennet.

nagevid ar beleg e-unan.

nag evid peb kristen en e bart e-unan

Med evid ar bed a-bez, gand ar beleg hag ar gristenien bodet endro d'an
aoter, stag o spered hag o halon ouz ar Beleg n'eus beleg nemetañ, Or Zalver
Jezuz-Krist.

Petromik.



sant gwenole hag an ankou

Sant Gwenole e-noa eta miret e vuhez da Hrallon ar roue koz, an hini a
rene e Kêr-Iz. Savet e-noa ive abati brudet Landeveneg, dirag Rumengol ha
war ribl morlenn Vrest. E-pad bloaveziou hir e-noa renet e veneh dre an
heñchou a gas da Zoue ha d'e Varadoz. Ha setu ma teuas da veza enoet war
an douar, ha m'en em lakaas da zoñjal mintin ha noz er maro hag en eternite.

War-dro ar maréou-ze e reas ouz or Zalver Jezuz-Krist eur goulenn ha
n'oa ket hini eun den fur, evel m'oa bet beteg neuze. E aspedi a reas da
lavared dezañ pegoulz e teufe d'e gerhad evid mond d'ar bed all. «Gwenole,
va mignon, a oe respontet dezañ, n'ema ket ar hiz ganin da respont da zert
goulennou. Med peogwir ho-peus va zervijet atao heb mank ebed, e roin deoh
evelato, dre vadelez vraz, an hanter euz ho c'hoant. N'anavezoh ket da vad pe
da vloaz e varvoh, na kennebeud all pa da boent euz ar bloaz. Gouest on avad
da rei deoh eur merk evid gelloud en em heñcha eun tamm bennag. Bez' e
vezo etre ar poent ma ne vez ket hoaz a wenan war-dro ar gwiniz-du hag ar
poent ma ne vez mui a gudoned war o zro, ablamour ma tibrader dija a freil-
hou a-zioh al leur.»

«Salver Doue, kement tra a rit a zo mad, ha kemend a lavarit a zo kerkoulz
all. Tra-walh am-eus evid derhel va ene e stad da vond dirag ho lez-varn.
Bennoz deoh eta, ha salv e teufe ho kras d'am skoazella muih-mui pa vo ar
gwiniz-du en o'bleñv ha pa vint greuniet.»

An dra-mañ a hoarveze d'ar houlz ma vez ar piged — anaoudeg euz an
amzer en a-raog — o fibaba d'ober o neiziou skourrou uhel, ma n'eus ket a
arne da gaoud, ha skourrou izel, ma tle an avel c'hweza dizamant.

«Setu 'ta, a zoñjas or zant, m'am-eus c'hoaz da dremen an nevez-amzer
hag an hañv penn-da-benn, peogwir, diouz an doare, n'ema ket an Aotrou
Krist ouz va gortoz araog dibenn miz Gwengolo.» Lezel a reas eta an traou
da vond beteg mare ar foenn hag ar herez. Hag a-daol trumm, setu m'en em
lakaas da yun, o soñjal n'edo ket pell an Ankou. Beh devez a yee hebiou,
e kreske e binijenn. Da houel Maria-hanter-Eost, e weled dija sklêr a-dreuz
e gorr, ha da houel Maria-Wengolo, ne oa mui anezañ nemed an eskern. Ar
veneh a houlenne an eil ouz egile, perag oa o zad ken droug all ouz e gorr
e barr an eost, ha perag ne falveze mui dezañ komz ouz an dud. «Sur a-walh,
a lavarent kenetrezo, eur glahar braz bennag a ra dezañ dizeha war dreid,
nemed hag e vefe an diaoul an hini a ra brezel dezañ.» Med ne gredent ket
goulenn outañ ar perag euz ar pezh a ree.

Ar gwiniz-du a oe dornet el leurioù, gouel Mikêl a yeas hebiou; sant
Gwenole a oa atao er bed-mañ. Soñjal a reas neuze ne varvfe nemed er bloaz
war-lerh. En em lakaad a reas eta da zebri, da eva, ha da veva evel peb unan.
A-benn gouel an Oll-Zent e oa anezañ eun den sounn war e gilhorou, ha doare
hegarad ha madelezuz dezañ.

Ar goañv a zeuas, an eoged a zeredas a-eneb red an dour er ster Aon, hag
ar piged a reas adarre o neiziou e gwez Koad ar Hrannou. Da houel Yann,
Tad Abad Landeveneg a gemeras e bicherad dour hag e vara zegal, hag a
yunas evel-se beteg ar houlz ma 'z a ar rederien d'ar park evid sevel ar gwiniz
goañv. Neuze e laoskaas eun tammig e binijennou, da hortoz staga adarre
ganto muih eged biskoaz. Pa nijas ar hudoned war-dro ar gwiniz du, e kollas
ar zonz euz blaz ar bara, ken nebeud e tebre anezañ etre sav-heol ha kuz-heol.
N'em-eus ket ezomm da lavared deoh ne varvas ket or zant er bloaz-se hoaz,
nag er bloaveziou war-lerh, nag er bloaveziou da-houde.

Neuze e hoarvezas ar pezh a dlee c'hoarvezoud. Skuiz o hortoz, or pinijen-
ner a zoñjas n'e-noa ket a vall Zalver Jezuz-Krist d'e weled dirag a lez-varn.
Laoskaad a reas, beteg chom heb yun nemed d'ar Horaiz, d'an Azvent ha
derhent ar gouelioù braz, ar pezh a vefe dija brao-kenañ evid eur hristen
ordinal, med ar pezh n'oa ket diouz doare eun den hag e-noa goulennet ha
bet ar hras da anaoud war yeteg nebeud deiz e varo.

N'em-eus ket ezom da lavared deoh na vankas ket an Aotrou Doue da zond
d'e gerhad p'edo an nebeuta war hed. Sant Gwenole a yeas da anaon d'an unan
warnugent a viz Gwengolo, pa pe dornet ar gwiniz-du en trégeziou en dro da
Landeveneg ha pa azve dija an avalou e liorz ar manati. Mervel a eure
e-kreiz an douster hag ar peoh, heb kleñved ebed e-wel, en eur zoñjal n'oa
ket ezomm d'en em dorr-penni kement-se gand an eur ziweza: an neb a ya
dêra bed all etre divreh Doue hag er garantez, a loh atao e koulz mad.

*Hervez ALAN GERNE, en e levr dudiuz «Penhoad»,
lakêr e brezoneg gand ARZEL GERVORVAN.*



FURNEZ AR RE GOZ

Kant lavar ne dalvezont ket eun ober.

N'eo ket bleo melen ha koantiri
Eo a laka ar pod da virvi.

Bara tonim ha keuneud glaz
A gas an ozah d'ar baz.

Bizin brein ha teil loued
A laka an ozah da glask e voued.

Bizin loued ha teil brein
A laka an ozah da zevel e gein.

E Inizi Hebridez, e Bro-Skos

" Eil Gweled "

E enezenn Skye, « Enezenn ar Vrumenn », evel ma reom anezi en ol lavar ez eus eur gêrig vihan. Hag, er gêrig-se, e weler kalz tiezigou koant, dichal a-walh dindan o zoennou plouz. Hag ar re a zo enno o chom a gav an tu da welout, dre ar prenestr, ar braoika korn-douar a zo er bed.

E-barz unan euz an tiezigou-ze e veve, eun amzer a zo bet, Donald Fraser, eur merour koz hag e-nevoa paket ar vrud, a-gleiz hag a-zehou e barg ar vro, da gaoud an « eil gweled ». Kalz istoriou a veze kontet diwar e bouez. Eur wech, a lavare an dud, a-greiz m'edo Donald o tiskuiza en eur park e-leh ma oad bet o vedi, eun dervez a viz Gwengolo, hag e-keid m'edo an oll o koania, setu eñ o kregi da zibuna traou iskiz, evel ma ra eun den pa gomz e-kreiz e gousk. « Gweloud a ran eur ster », emezañ, « ha bugale o c'hoari war ar ribl... Beuzet e vo krouadurig Mari... Hl bremañ e klevan eur vaouez oh hirvoudi ». Antronoz, gwreg ar mesaer-deñved a oa o chom en eun tiig-soul e-tal eur parkad ed-du, a laoskas he zri bugel da hoari e-kichen an nor. Mond a reas he-unan d'ar verouri dosta, da dremen he amzer vak e-pad eun eur bennag, e-ser flepa gand ar merhed. Eur froud a oa hag a ziskenne a-lammou gand torr ar menez, hag a dremene tostig a-walh d'an ti-zoul. Ar yaouanka euz ar vugale, unan bitous tri bloaz, a yeas war-du ennañ hag a ruduilhas e-barz; setu eñ stlejet mell-divell gand kas an dour, ha beuzet. Redeg a reas an daou-all d'ar verouri da lavaraoud d'o mamm. Gand ar strafuilh e tiredas ar vaouez d'ar gêr, a-dreuz ar parkad ed-du, hag hi o krial gand samm he glahar, heñvel-mik ouz ar pezh e-noa klevet Donald Fraser en derhent.

E stankenn Frassifern, bro al laboused, bro ar bokedou, bro hag a vez leun er an amzer enni gand c'houez vad ar jenofl adaleg ar penn kenta euz an nevez-amzer beteg fin kala-gañv, eur mintinvez eta m'edo diwezad en heol oh en em ziskouez, e krapis gand eun nebeud mignoned d'in ouz torr gwisket gand brug Menez Mavis. Hanter-hent, war wenodenn an deñved, e kavjom eun den braz izili hir dezañ, heñvel liou e vleo ouz hini an houarn ha stank ar baro war e chiñk. En e zorn e oa eur mell baz-kelvez. Diouz ar gwell anezañ, eh anavezjom kerkent e oa eur hatekizer, da lavaroud eo eun den o hounid disterig e vara en eur vond du-mañ ha du-hont, dre gornadou pella ha dizarempreta an enezenn, da zeski d'ar re lezireg ha d'ar re zizesk penaos respont tostig da vad d'ar goulennou-katekiz. Ehana a reas da gerzoud p'or havas, hag e houlennas diganeom eur friad butun malet. N'on-oa tamm ebed. « Neuze marteze », emezañ, « or befe gellet kinnig dezañ eun tamm kreun-bara pe zaou, rag kêr e oa ar bevañs ha tano an arhant ». Er wech-mañ hoaz, ne oem ket evid rei netra. Setu eñ neuze da zevêl e vouez d'or milliga. E valloz a daolas warnom, mesk-ha-mesk, e saozneg fall hag e lavar an enezenn ês a-walh da gompren. Gervel a reas an traou kosa ha Penn Kenta ar Hosa Amzeriou d'or milliga gwelloc'h, ha pa dasas da gomz, et skuiz moarvad, eh azezas war eur pezh mên. Lavaroud a reas deom e oa seizved mab e dad, hag e-nevoa an « eil gweled ». Gweloud a ree seblañchou. « Eun ti entanet a welan », emezañ, « ha tud o redeg du-mañ ha du-hont. » Mond a rajom kuit dioutañ en eur hoarzin, rag ken karget e oam gand levenez ar mintinvez-se a viz Ebrel, ma ne reem stad ebed euz e valloziou nag euz ar pezh a wele.

Diou zizun diwezatah, e welas unan ahanom an tan o tevi e di beteg an douar, ha paneve d'ar zikour vad a roas an amezeien, o defe kollet daou zen o buhez e-barz an tan...

E stankennig Afton e weler atao eun tiig en e zav war ribl an hent. Ennañ e oa o chom, eur pennad 'zo, eur here hag a wele ivez, war a lavared. Soñj o deus hoaz an dud euz e ganaouenn, er hornad-se euz an enezenn :

*Gwiader o wea steuenn ar vuhez,
Kalvez o kempenn eskern mab-den,
Didrouz e-kreiz kann ha trouz,
O kempenn soñjou pell a-raog ma vo deuet ar mare,
Ra zeuy peb gweledigez a welan
Da zigas d'in eur bennoz !...*

A drugarez Doue, dibaot eo an dud (ma 'z eus hoaz anezo !) hag a hell gweloud a-dreuz ar ouel-ze a zo o kuzad an amzer da zond evel m'ema da veza, strafuilhuz, skeduz, riskluz pe glaharuz.

An Divroad

En enezenn Uist, bro Flora Mac Donald, ar plah-se ken brudet hag a gredas ober kement evid he 'frifis ken reuzeudig, Charlez-Edward, e oa o veva, bremañ 'z eus kalz bloaveziou, eun den, Andreo Graham e ano. Seizvet mab e oa da Amis Graham, ar pesketaer, hag hemañ a oa ivez seizvet mab e dad. Souezuz-kemañ e oa ar galloud e-nevoa Andreo Graham; gweloud a helle o tremen dre doull-dor ar vered d'an deiz kenta a beb bloaz, pa veze daouzekvet taol hanter-nôz o son, spesou an tri den a dlee mervel da genta diouz tro.

Eur wech, p'edo o tistrei da houlou-deiz euz e veilhadenn iskiz, e oa gwall-brederiet e spered dre ma kerze gand e hent. Eun den braz e oa, diousoaz ledan dezañ, ha kreñv, nemed e oa chomet disterohig e har zehou da heul eur ruadenn e-nevoa tapet gand eur gazeg. P'en em gavas en e di-zoul, er stankennig hlaz, e oa dihun e wreg.

« Piou e oant ? » a houlennas hi.

— Da genta eo bet deuet Berhed goz, Berhed Catarac'h, euz ar Stankenn Veur. »

— Deg vloaz ha pevar-ugent echu, eo ! » emê ar wreg. « Feiz ! hounnez n'he do ket digarez d'en em glemm ! Ne vo ket bet samm et gwall-drumm gand an Ankou. »

— Da heul », a lavaras c'hoaz Andreo, « e tēuas krouadurig paotr al lizerou, krouadurig Neil, ar bugel-ze hag e neus daoulagad frank re-bar da feunteuniou ar menez, hag eur penn ken teñval. »

— Ha n'hel lavaren ket ? » emê ar vaouez. « Treutoh-treuta ez a ! Hennez n'eo ket bugel d'ezo, sur ! Tamm ebed ! Nann, avad ! Laosket he devoa an Neilenn, gwreg paotr al lizerou, he gwir vogel, maget mad ha koant, en e gavell diouz ar mintin, e-keid ma oa bet o vond gant mall d'ar waz da gerhad dour. Hag edo ar horriged o hortez e-touez ar yeot, ya, hag her hemeret o deus, ha laosket ar hrouadur ratous-se war o lerh !... Met livirit din, Andreo, piou a oa an trede ? »

— An trede », emê Andreo, « tenna a ree din kement ha diou luhedenn an eil d'eben. Gwelet em eus eun den braz ha pounner. E ziouskoaz o devoa doare da veza kreñv, hag en eur gerzoud e ree eun tammig ar hamm gand e har zehou. »

Kerkent e krogas ar vaouez da dermal.

Eun den yaouank e oa, Andreo ? » emê.

— Ne oa ket eun den yaouank, ar wreg ! » a lavaras eñ. « War-dro an oad din e helle beza, pe war bouez nebeud. Eun divroad bennag en em gavet dre amañ e tle beza. Marteze eur merour nevez-deuet euz Stankenn an Aber », emezañ hoaz.

En endervez-ze, e tiskennas Andreo Graham da gêrig Struss, e-leh m'edo e hoar intañvez o chom.

« Setu eun tamm kig yourh evid ho pugale vihan emzivad, leueouigou va halon ! » emezañ en eur deurel an tamm kig war an daol.

— Bennoz Doue deoh, Andro. Ha piou ha peus gwelet er vered an neizour, Andro ? » a houlennas ar hoar.

— Berhed goz », emezañ, « ha mabig cheñchet Neil, paotr al lizerou. »

— Trišt ha teñvel eo bet da wreg Neil », emezi, « an devez ma teuas an Dud vihan en dro d'he zi. Ha piou a oa an trede ? »

— Eeun-hag-eeun, ne hellan ket lavaroud », a respontas Andro, krizet e vourenn. « Kement ha me e oa, eur hein mad dezañ, hag e har zehou a-stlej eun tammig pa drementas em hichen ! »

Gwall-livet ez eas ar vaouez. Hag hi da stoui prim war-du an tan, e-giz pa vefe bet o vond da lakaad mouded taouarh ennañ. « Evelkent ! » emezi, « evelkent ! » Ha netra ken.

Tremen a reas ar sizunvezioù. Ha setu ma teuas tro Berc'hed goz, euz ar Stankenn Veur. Hi hag a oa bet kent, kalz bloavezioù-all a-raog, greet al lez d'ezhi ha goulennet gand meur a baotr ablamour d'he gened ha d'he neuz-vad, a glevas neuze ouz he gervel mouez he zervicher diweza, an Ankou, ha setu hi eet gantañ d'al leh merket.

Eun nebeud sizunvezioù bennag diwezatoù, ha setu krouadurig Neil, paotr al lizerou, ar hrouadurig-se hag a ouie gwelloc'h eged ar re-all euz a be leh e teue, o kemeroud ivez an hent-se hag a ya en tu-all d'ar stered uhella.

Andréo Graham, eur mintinvez, en devezioù kenta a viz Meurz, p'edo o klask eur penn-dañvad diantket war zinaoñ ar menez, a zellas d'an traoñ etrezeg ar gêriadenn hag ar vered. Soñjal a reas en daou vez-se nevez-toullet. Hag eñ souezet hoaz o klask gouzoud piou a helle beza an divroad braz ha ledan-se a oa war-nez mond en trede toull. Avel yen ha lemm a houeze, hag en eun taol, setu teñvalijenn en oabl, e-keid ha ma oa eur barrad-erh troidelluz o tond da skuba ar menezioù. Tevoh-teva e koueze ar pluennou gwenn. Dall ez eed ganto. Dizale e oa bet goloet ar gwenodennoù ha roudou an deñved.

Amañ hag a-hont e tastroade Andro, o klask dindan an erh war dorr ar menez, ar wenodenn anavezet ken mad-all gantañ, ha na oa ket gouest da gavoud ken.

Daou zevez diwezatoù pa skleraas an amzer, e oa bet digaset d'ar gêr korv yen Andro Graham, bet kavet war ar menez. Ha douget e oa bet d'ar vered. Gwall-spontet e oe an dud vad gand eur seurt darvoud, avad ; hogen, diou vaouez a oa hag a oa bet trubuilhet-braz o spered a-raog gand aon rag an deiz-se, ha kement-se e-pad sizunvezioù...

H. Sinclair.

*Troet gant aotre an oberour eus ar saozneg e brezoneg
Gwened ha lakeet da houde e brezoneg ar vro-mañ
gand Y. G.*



TENZOR AR BREZONEG BEO

11. Beg.

« *Foar ar begou* ». E Bro-Gerne izel, ar foar-goumanant leh ma tired ar baotred hag ar merhed yaouank a zo o klask labour egiz mevel pe vatez war ar mēz. Ar baotred a veze o klask fred a veze ganto eur penn-ed war o zok. War eun dro e oa ive eur foar yaouankizou ; ahano an ano roet dezi. Wardro Skaer an oll vevelien ha mitizien a veze evel ma vefe torret o houmanant bloaz hag a veze dispeg epad 8 pe 10 dervez, e mare ar bloaz nevez. Frankiz a veze roet evel-se, d'an eil ha d'egile, mistri ha mevelien, da glask gwelloc'h ma kavrent. Awechou e chome lod mevelien pe mitizien heb kaoud « perhenn » ; lavaret e veze neuze e vezent « *chomet war al lann* ».

Beg-c'hwero. « Ar vaouez-se he-deus eur beg c'hwero » (cette femme a des propos blessants). St-Segal, Y. Madec, 1942.

12. Belen.

= eur pennad labour a-zevri, eur hrogad. « N'om ket deuet a-benn da echui ar parkad eost ; *eur belen on eus greet warnañ avad*. » (Kleder.)

13. Bena.

= tailler. Implijet er gêr *mein-benèrèz* (pierre de taille) pe *benèrèz* nemed-ken. En tiez nevez e veze lakeet *mein-benèrèz* da ober *mein-korn* ; an tiez koz, doare manerioù dezo, a vez awechou netra nemed *benèrèz* enno. Ar verb *bena* n'eo ket anavezet e Gorre-Leon. Lavaret e vez : *pika mein*, eur *piker-mēn*, *pikerien-vein*.

Ar gêr Kemener a deu euz an heveleth orin : *Kem-Bena*, *bena* ha lakaad asamblez.

14. Benniga.

En eur vond tre en eun ti edo ar hiz da lavared : « *Doue ho pennigo !* » hag e veze respontet : « *Bennoz Doue deoh !* » Al lavarenn-zé a gavom kizellet er mēn a-uz d'an nor e maner Kerulud (Kerlud) e-kichen Pont'n-Abad, bet savet er bloavezh 1896.

Diouz an dra-ze e welom e talvez an doare amzer-da-zond (futur) evid an doare heta (optatif). E Gorre-Leon e kavom hoaz « *Doue ho pao !* » lavaret gand ar fabrik o kestal en iliz. « *Va zad Doue e bardono ! va mamm, Doue he jardonno !* » (Mon père que Dieu ait son âme, ma mère...) N'eus ket « *ra* » ebed. Er vro-vigoudenn hag e bro Kollorég kennebeud.

F. Falc'hun a skriv din e viz « lavaret « *Doue r' ho pennigo !* » e Goueled-Leon. An dro lavar gand ra a zo koz tre, peogwir e kaver anezi ive e kembraeg hag en Iwerzong ».

A hent all, e gwirionez e vez lavaret ive « *Ar Zakramant meulet ra vezo* ».

— « *Ra blijjo gand Doue...* »

« *Doue d'ho penniga !* » ne vefe ket fall kennebeud.

En Enez Sizun e leh « *Doue ho pennigo e vez lavaret, « Joa d'an anaon !* »

— *Bennoz Doue deoh !* »

E Kleder e oe eun doare all da zaludi an dud en eur vond tre en eun ti : « *Ha deoh, Fanch !* » hag e veze respontet : « *Ha deoh !* »

15. Bern.

E Gorre-Leon, pa lavar unan bennag « *Led e vefe ober an dra-mañ... led e vefe ober an dra-hont...* » (led = dleet) e vez respontet dre 'fent : « *Led ! led !... led ne ra ket a vern* ». (Leda eo ar hontrol diouz bernia.)

Tri dra a ranked gouzoud ober da zonjal beza eur mevel mad : *arad*, *karga* ha *bernia*.

16. Berr.

« *Berr eo warnañ* » (poan e-neus o kaoud e alan). « *Berr eo ar bara ganin* »

— « *Berr on e bara* » — « *Berr on a vara* » (N'am-eus ket tre awalh).

« *Berr eh en em gavan gand va labour* » (eun tammig diwezad).

« *Hennez a vez berr atao* » (gand e arhant, gand e labour...) « *Berr eo dezañ e hounidou* » (Ne hounid ket awalh). « *Berrentez a zavas gantañ*. »

« *Beza berr ha teo*

« *N'eo ket beza bihan eo*. »

V. F.

OR madoBEROURIEN

500 lur hag ouspenn :

Aotrounez **Le Floch**, Corbell ; **Le Lann**, An Oriant ; **Bongrain**, Mamers ; **Audio**, Plouay ; **Rousseau**, Naoned ; **Falc'hun**, Roazon ; **Renault**, Paris ; **Chaloni Coadou**, Kemper ; **Favé**, St-Tegonneg ; **Coroller**, Paris ; **Cloarec**, Kastell-Pol ; **D^r Ezel**, Douarnenez ; **Nicol**, Louargat ; **Le Gible**, Brest ; **Itr. Le Moal**, Naoned ; **Guillerm**, Laniliz ; **Itr. Le Minor**, Pont'n-Abad ; **D^r Léon**, Pacé ; **Cormerais**, Naoned ; **Chaloni Falc'hun**, Plouzevede ; **D^r Le Breton**, Boulvriag ; **Le Cogic**, Ar Zant ; **Chaloni Guivarc'h**, Landivizio ; **Dimezell Coadou**, Lokorn ; **Ozoux**, Bonaké ; **Burgeot**, Trussac ; **Menou**, Gwaien ; **D^r Colonne**, Rouen ; **Le Du**, Lopereg ; **Itr. Liberal**, Brest ; **Colonel de Malleray**, A.F.N. ; **Mazé**, Rouen ; **D^r Kervran**, Maisons Laflitte ; **Pijon**, Naoned ; **Sœur Anne Ronan**, Elliant ; **Coulouarn**, Roazon ; **D^r Jaouen**, Kerlouan ; **Noury**, Crozon ; **Chaloni Rannou**, Douarnenez ; **Page**, Landerne ; **Abbé Badoual**, La Harrois ; **Le Floc'h**, Dinan ; **de Guébriant**, Kastell-Pol ; **de Poulpiquet**, Plougerne ; **Berre**, Nouméa ; **Bertho**, Le Mans ; **Iliou**, Caen ; **Chaloni Lescop**, Kemper ; **Chaloni Nédélec**, Kemper ; **Jacob**, Plourin-Ploudalmézeau ; **Jadé**, Kastellin ; **Le Goff**, Gouezeg ; **Bothorel**, Kastell-Pol.

100 ha 200 lur :

Aotrounez **Fiquemo**, Rohan-Chabot, Jestin, Le Bihan, Audio, Salaun, Salaun, Chevillotte, Bihan-Poudec, Séité, Cadiou, Inizan, Guivarch, Pellé, Colléter, Séité, Abguillerm, Guilleux, Runpaot, Gourlaouen, Le Ster, Dom Nicolas, Le Graet, Le Gallic, Gourmelon, Uguen, Guichoux, Cozien, Mahé, Le Mercier d'Erm, Abléan, Penoréach, Brigant, Souffès-Desprès, Maury, Kerdilès, Coum, Richard, Havard, Ménez, Quénnec, Creff, Auffret, Père Eugène, Le Moigne, Guilcher, Aubry, Denmat, Hély, Quénnec, Falc'hun, Appéré, Le Minor, Guernic, Allain, Eliès, Queffélec, Herry, Blons, Lemarié, Mériadec, Dujardin, Bernard, Roué, Le Bihan, Lagatu, Tanguy, Diverres, Fontaine, Quillivéré, Pellé, Abjean, Plantec, Champroux, Marquer, Cazin, d'Honinc-thun, Allouarn, Acquitter.

5.000 lur : Ao. Mocaër, Kemper.

Bennoz Doue d'on oll vadoberourien !

D	E	R	E	Z	I	O	U
I		A	M	O		A	Z
H	E	G	A	R	A	D	
U	N	A	N		R		I
N		C		E	V	E	Z
E	L	H	U		E	N	E
T		A	N	E	Z		L
	E	D		G	I	N	A

GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niv. 106

A-led.

- I. Evel Adam hag Eva e baradoz an douar. - Komz ouz Doue !
- II. Miz. - A vez lavaret d'eur mignon.
- III. E kreiz ar himiad. - N'eo ket eul leh plijus.
- IV. Rog. - Euz ar verb beza.
- V. Tech-fall.
- VI. Ma ne heulier ket e reolennou, ne reer netra a zoare. - Kaoud aon.
- VII. Or mestr.
- VIII. N'eo ket ez labourad gantañ. - Euz ar verb toñ.

A-bik.

1. Peurrest.
2. Pedenn evid ar re varo.
3. Artikl. - Gourhemenn.
4. Pa bar an heol (kemmadur). - Llo.
5. E lesneven. - Eun amezeg.
6. E-kichen.
7. E-kreiz. - Disklabez.
8. Hebdo eo diêz chaokad.

	1	2	3	4	5	6	7	8
I								
II								
III								
IV								
V								
VI								
VII								
VIII								

kan notennou ar skeul - gan chant des notes de la gamme

Ton ha son gand L. Lok



I

(Goustadig, distaga mad peb notenn ha peb gér, peb silabenn.)

E va zi 'z eus eul logodenn
Hag a oar dibuna pedenn,
Ar Bater koulz hag ar Gredo,
Ha muzikad gand ar piano
Do, ré, mi, fa, sol, la, si, do.

En ma maison il est une souris
qui sait dévider prière
le Pater tout comme le Credo
et jouer du piano
do, ré, m, fa, sol, la, si, do.

II

Ha ma welfeh, gand beg he fri
Va logodennig o hoari !

Oh ! si vous la voyiez, du bout de son
[nez,
ma petite souris en jouer !

(Ober an neuz, oh heja penn, da lopa gand ar fri war eur piano.)

Lopa 'ra war an do, ré, mi,
Hag ive war fa, sol, la, si
Hag ive war fa, sol, la, si.

Taper sur le do, ré, mi,
et aussi sur fa, sol, la, si,
et aussi sur fa, sol, la, si.

III

(Digeri braz an daoulagad hag ober an neuz kaoud aon. Goustad.)

Spontuz an trouz 'vez war an do
Pa warnañ gand he lost e sko !

Epouvantable le bruit que fait le do
quand de sa queue elle frappe dessus !

(Laouen, buhannoh, ober eun taol dañs. Manca ar bizied evel pa vijed o seni eun dañs war eur piano.)

Gand he bizied hi oar an dro,
Seni gavotenn ha dañs-tro,
Tra, la, la, la, ni, la, le, no !

De ses doigts elle sait la manière
de sonner gavotte et danse ronde.
Tra, la, la, la, ni, la, le, no !

IV

(Ober an neuz d'o lakaad da zañsal.)

Lakad Minetig da zañsal,
Ha Minet d'ober kemend-all.

De faire danser le petit Minet
et le Minet en faire autant.

(Goustad, goustatoh ha... solanel.)

Med n'int ket dreist d'am logodenn
Da gana Bro-Goz a bouez-penn
Hag ar Sao Breiz-Izel ouspenn.

Mais rien n'est supérieur à ma souris
pour chanter le Bro Goz à tue-tête
et le Sao Breiz-Izel en plus.

Embannadurioù "EMGLEO BREIZ"

Lexique Breton-Français et Français-Breton
(Stephan-Seite), 335 francs, franco.

L'Orthographe Universitaire de la Langue Bretonne
(Falc'hun-Dujardin), 190 francs, franco.

Mil Pok (J. Noel), 50 francs, franco.

Seiz Pennad-Lenn, 50 francs, franco.

Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg
(J. Tricoire), 300 francs, franco.

Mojennou Breiz : 1) Ar Mor
(Pierre Hélias), 305 francs, franco.

Geotenn ar Werhez (J. Riou), 385 et 535 francs, franco.

Barzonegou (Reunan ar Mough), 200 francs, franco.

Gand Red an Dour (R. Broudic), 200 francs, franco.

Ar Roh Toull (Jakez Kerrien), 385 francs, franco.

Cent Textes de Thèmes (Pierre Trépos), 285 francs, franco.

An Azennig Bihan (Evid ar vugale), 235 francs, franco.

Eur Honiklig Boudedeo (Evid ar vugale), 235 francs, franco.

Deskom Brezoneg (Skeudennet)
(Seite-Stephan), 670 francs, franco.

Embannet gand « KENDALC'H » :

Breiz Hor Bro, 170 francs, franco.

Kanom Uhel, 170 francs, franco.

Skoazellet gand « EMGLEO BREIZ » :

Dasson ur Galon (Loeiz Herriou), 670 francs, franco.

Bleuniou Arvor (Mab an Dig), 220 francs, franco.

Goulennit anezo digand :

« FONDATION CULTURELLE BRETONNE »

Boîte Postale 17, **BREST** — C.C.C.P. 380-96 **RENNES**

« **Emgleo Breiz** » a embann ivez eur gelaouenn lennegel e brezoneg penn-da-benn: **Brud**. Diou niverenn a zo deut er-mêz bete vremañ. Koumanant bloaz : 900 francs. Koumanant skoa-zell: 1500 francs. Priz an niverenn: 250 francs. — Skriva da: « **Brud** », B.P. 17 Brest. C.C.P. 1021-04 Rennes.